

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

33. KARANN AR BRIZ

Karan ar Briz eo a ouele
ne gave den her frealze
nemed he baeroun hennhez a ree.

Karann ar Briz eo a ouele
an nor war he vam pa zigore :
- Tavit, va mamm, na ouelit ket
o tenna d'ar billet ez unnn bet
ann hini du am euz tennet.
- Tao, Karan ar Briz, na ouel ket.
unan bennak a rank monet.
- Me ne rajen forz evit partia
panefe va mam a zo klanv,
zo seiz vloaz zo war he gwele
ha ne deuz nemet unnn-me.

- ha kea 'ta, kea, Karan ar Briz
pa zai da gorf gant ar roue
ra zai da ene gant Doue.

- Dalit, aotrou persoun 'n alc'houesiou
it va welet va mam avesiou.

- Laka da alc'houesiou e leac'h ma kiri
me a iel teir gwech bemdez da ti.

- Aotrou sant Karann, va faeroun,
grit eur burzud bennak evid oun.

Lakit ar c'hleier da zini flam° °a-us : splan
pa vo va mam ern he zremenvan.

Karan ar Briz a lavare

d'he gabiten eunn deiz a oe :

- Me glev kleier va bro o soun splam
va mamm baour zo enn he zremenvan.

- Ho ne ket gwir a leverez te
re bell emroud diouthe;

'maout pemp kant leo dioc'h da vro.

- Taolit ho troad war va hini
hag e klefot arezho o sini.

Ar c'habiten a lavare

da Garann ar Briz enn deiz-se :

- Skriva e gonje d'ann den man
maz ai da velet he vamm zo klan.

- 94 -

Karann ar Briz a c'houlenne
 enn he vro na pa zigweze :
 - Petra zo nevez er bourg-man
 ma soun ar c'hleier evel 'maro.
 - Daou viz hanter a vo 'hep dale
 ma 'ma ar c'hleier war vole
 ma sounont noz deiz evelse.
 Karann ar Briz a c'houlenne
 oc'h ann aotrou Persoun enn deiz-se :
 - aotrou persoun, ann alc'houesio
 maz inn da velet va mam zo maro.
 - Ne deo ket gwir a leverez
 da vam a zo c'hoaz e buez.
 emoun o tont euz he gwelet
 ne deo ket abaoe marvet.
 Karann ar Briz eo a ouele
 ann or war e vamm pa zigore.
 Daou bok d'he vam en deuz roet
 he galoun dre 'n hanter zo rannet.
 Goude 'n daou°poket dezhi
 oe tennet he vam war al leur zi.
 Ar Werc'hez ha santez Anna
 a oa ho diou oc'h he liana.

°a-us : m'en doe

vvvvvvvvvvv